

Fardell an Drenneg

- 1- E Sizun ha Kommana
Hag ivez Sant Kadou
Ster an Elorn a rede
E-kreiz ar pradennoù
- 2- En he dour sioulik ha sklaer
Ar pesked a lamme
'Barzh ar gwez bord ar richer
Laboused a gane
- 3- Lintran rae evel ac'hant
An heol benniget
E sklerijenn al loar
Pe lagad ar stered
- 4- E keriadenn an Drenneg
Tost ar Menez Are
E-peoc'h e-touesk al lann
Tiegezhiau a veve
- 5- Ar vilin `vale an ed
D'an holl dud tro war dro
Dour ruilhe war ar rod vras
Evit he c'has en-dro
- 6- Un diviz `neus kellidet
E spered meur a zen
Sonjal sevel ur fardell
E traonienn an Drenneg
- 7 - Un dour deus richer Elorn
Dije talvoudegezh
Evit magan ar c'herioù
A zo en dienez
- 8- Ar vilin zo bet beuzet
An ti hag ar c'hreier
Div atant e Stamouezac'h
Da ober ar fardell
- 9 - Pemp warn ugent metr donder
Ur foz `zo bet kleuziet
Da zalc'her dour ar richer
Evit feurmin ul lenn
- 10- Hag e-kichen al Lammfrount
Skedus hag arc'hantet
Evit treuzin ar fardell
Ur pont `zo bet savet
- 11- Hag er bloavezh mil nav c'hant
Daou ha pevar ugent
E oa echuet ar fardell
E kalon an draonienn
- 12- En drenneg gwechall divrud
Ez eus kalz chenchamant
Hiziv eo anavezet
E pevar korn ar Frans
- 13- Tудоù deus nord Penn ar Bed
Troit ho tuellennoù
Dour an Elorn a sinklo
Evit hoc'h ezhommoù

Geriaoudegig

Fardell = retenue d'eau

Ster rivière

Prad = pré

sioulik = calme

Ruilhal = ruisseller

Traonienn - vallée

kellidan = germer

lamm = bondir, tomber

Lintran = luire

richer = rivier

Sklerijenn = lumière

keriadenn = village, hameau

e-peoc'h = en paix

e-touesk = parmi, au milieu

talvoudegezh = richesse

dienez = en manque

Magan = approvisionner

beuzet = noyé

kraou (kreier) = étable

atant = ferme

donder = de profondeur

Kleuzan = creuse

feurmin = former

Lenn = bassin

treuzin = traverser

Skedus = éclatant, rayonnant

divrud = ignoré, déconsidéré

Tu(v)ellenn = robinet, tuyau

Sinklan = jaillir, gicler

ezhommoù = besoins